

AR C'HEMMADURIÒÙ

LODENN

4





AR C'HEMMADURIOÙ DRE VLOTAAT (1)

lennadenn

Aet e oa ar vugale da welet ur vaouez kozh a oa o chom e-kichen ar gar. En he liorzh e oa azezet ar vaouez, war ur gador vihan dindan ur wezenn vras. Tro-dro dezhi e nije balafenned. Ur valafenn c'hlas en em lakaas ur pennadig war vord an daol koad dirazi. En tu all d'ar gloued wenn e veze klevet rod ur vilin o chourikat. Pelloc'h er bradenn e oa ur c'havr wenn o peuriñ. Azezet e oa ar vugale war ar geot o selaou ar vaouez kozh o kontañ buhez an amzer wechall. Ur plac'hig a oa o c'hoari gant ur vleunienn wenn. Ur banerad kouignoù a oa gant ar skolaer. Ur verenn-vihan vat a voe aozet el liorzh. Unan eus ar vugale, unan bras, en devoa degaset e gaier hag e greion hag en devoa skrivet en ur selaou ar vaouez. Ur wech distroet er skol e voe graet ur gentel verr. Pep bugel a reas un dresadenn gaer war ur baperenn vrav da zerc'hel soñj eus an devezh-se. Nemet Fañchig a oa aet, sur a-walc'h, e spered da nijal pell hag a souezhas e vignoned hag e vestr skol:

— Petra zo war da dresadenn, Fañchig?

— Ur vag vras. Bez 'emañ ar vartoloded o touarañ war un enezenn vurzhus. Ur varrikenn dev o deus kavet war an draezhenn.

— Ha pelec'h e oa da benn hiziv, Fañchig?

goulennoù

Islinennit e ruz hag adskrivit war ho kaier an holl strolladoù anv a zo enno: ger-mell + anv, ger-mell + anv + anv-gwan.

Savit un daolenn war ho kaier ha leugnit anezhi:

anvioù gwregel unan	anvioù tud gourel lies

Peseurt kemm a welit en anvioù? En anvioù-gwan? Daoust ha kavet hoc'h eus anvioù-gwan ha na heuliont ket an hevelep reolenn?

Lakait an anvioù: — gwregel unan el liester.
— tud gourel lies en unander.

Petra 'c'hoarvez?

kentel

1

Goude ar ger-mell e kemm lizherenn gentañ an anvioù gwregel unan hag an anvioù tud gourel lies.

C'hoarvezout a ra ar c'hemmadurioù-se gant an anvioù o kregiñ gant K, T, P, G, B, Gw pe M:

K	T	P	G	Gw	B	M
		a zeu	da vezañ			
G	D	B	C'h	W	V	V

Kemmadurioù dre vlotaat a vez graet anezho.

kadorar gador
 kazetennerienar gazetennerien
 taolan daol
 tudan dud
 panerar baner
 peorienar beorien
 gavrar c'havr
 gourenerienar c'hourenerien
 balafennar valafenn
 Bretonedar Vretoned
 gwezennar wezenn
 gwardedar warded
 mammar vamm
 moraerienar voraerien



1) Anvioù gwregel 'zo na heuliont ket ar reolenn-se:
Plac'h, greg, gar (hent -houarn), **gavotenn**.

2) An anvioù tud gourel lies oc'h echuiñ gant **-où** ne gemmont ket kennebeut:
an tadoù, an testoù, ar priedoù, ar maerioù (hogen: **ar vaered**)



2

Kemm a ra ivez an anvioù-gwan goude an anvioù gwregel unan hag an anvioù tud gourel lies.

	K	T	P	G	D	B	Gw	M
	<i>a zeu da vezañ</i>							
pa vez un anv oc'h echuiñ gant ur vogalenn pe l, m, n, r, v	G	D	B	C'h	Z	V	W	V
pa vez un anv oc'h echuiñ gant d, t, s, z, zh					(Z)	V	W	V
pa vez un anv oc'h echuiñ gant ur gensonenn all				C'h	Z	V	W	V

Un daol gozh
 Ur vaouez koant
 Ur wezenn wenn
 Ur voutailhad gwin
 Ur vag vihan
 Ur vog kozh
 Ur vazh tev
 Ur vazh verr

poelladennoù

1 Leugnit gant ar gerioù roet etre krommelloù :

- Bemdez e lennomp ar..... (kelaouenn)
- Leun a zour e oa ar..... (boutailh)
- Ur..... bugale trouzus a c'hoarie war ar porzh.
(bandennad)
- Ar..... a blij dezho beajiñ, met laouen e vezomp bepred o tistreiñ d'ar..... (Bretoned, kêr)
- Prest e oa ar..... har ar..... d'en em ginnig dirak an..... (kanerien, gourenerien, tud)
- An..... hag ar..... a oa skuishoc'h eget ar..... (tadoù, mammoù, bugale)
- Treuzet e oa bet ar mor divent gant ar..... war ur..... nevez savet ha dizoloet o devoa ur..... estren.
(moraerien, bag, bro)

2 Lakait an anvioù-gwan en ur ober ar c'hemmadur pa vez da ober :

- Ur baotrez..... eo Annaig. (koant)
- Dirazoc'h e c'hellit gwelet un enezenn..... (kaer)
- Pegen brav eo ar gazhez..... -mañ! (bihan)
- Ur vougev..... a zo e penn an hent-mañ. (teñval)
- Ur banerad..... a oa gant ar vaouez..... (ponner, kozh)
- Prenet he deus Lina ur vrozh..... , he c'hoar Katell he deus prenet ur vrozh..... (melen, glas)

3

Lakait an anvioù gwregel unan el liester:

Ul loa hag ur volenn am eus lakaet war an daol.
An nor a zo chomet digor.
Skuizh e oa ar vaouez gant he labour.
Ar c'havr he devoa lammet dreist ar c'hleuz.
Sell ouzh ar viskoulenn war ar vleunienn-mañ.
Ar baner hag an davanjer a zo chomet war ar gador.

4

Lakait ar frazennoù-mañ en unander:

Setu ar gelennerien o tont.
Ehanet o deus ar vicherourien gant o labour.
War ar porzh emañ ar vugale.
Mont a ra ar besketourien war-zu an aod.
An Dregeriz-mañ a vez prest da c'hoarzhin bepred.
Dirak ar c'hastell e oa ar warded war evezh.

Ar bleunioù glas-mañ a gavan bravoc'h eget ar bleunioù gwenn-se.
Ne c'hello ket ar bigi kozh-se mont pell ken.
Sellet a ran ouzh ar c'houmoul tev o tont.
Kentelioù berr a vez graet bemnoz.
Kartennoù brav am eus bet hiziv gant ma breur.
Dindan an armelioù bras e oa skoachet botoù kozh faoutet.



AR C'HEMMADURIOÙ DRE VLOTAAT (2)

lennadenn

— **Daou** gi am eus c'hoant **da** gaout, **eme** Vari.
Unan du hag unan gwenn.

— **Div** gazhez am bo-me! **eme** C'houlven. **Unan**
wenn hag **unan** zu! Ur pesk ruz am bo ivez,
hag **a** ouio kanañ!

— Pff! N'eo ket **gwall** ziaes! An **holl** besked
a ra kemend-all! Ma c'hi du din-me **a** ouio neuial
dindan vor!... Ha **diwar** dizh!

— **Ne** gredan ket se. Meur **a** wech 'teus kontet
bidennoù din!

— **Re** wir eo koulskoude! Ha me d'an nebeutañ
ne valan ket gevier **war** goust ma mignoned...

War drenkaat ez a ar soubenn etre an **daou**
gañfard. Oc'h **en em** gannan emaint! **En ur**
ouelañ dourek e tistroont davet o mamm.

— Ken sot an hini bras hag an **hini** vihan! **eme**
Vammig.

goulennoù

Adskrivit war ho kaier-esae pep ger livet e glas gant ar
ger a ya d'e heul.

Klaskit ar c'hemmadurioù a c'hoarvez amañ.
Grit ur roll eus ar gerioù a zegas kemmadurioù.
Klaskit o implij e frazennoù eeun gant gerioù o kregiñ gant :

K T P G D B Gw M

Bez' e c'hellot neuze sevel hoc'h-unan un daolennig a
gemmadurioù dre vlotaat ; peurechuet e vo er gentel.

kentel

C'hoarvezout a ra kemmadurioù dre vlotaat goude :

daou, div
a
da
dindan
diwar
eme
endra
en ur
war

Araogennoù

a
en em

Rannouigoù

pa
pe

Stagelloù

gwall
hanter
re
seul

Adverboù

na
ne

Gerioù nac'hañ

pe

Ger-goulenn

an hini (gwregel)
unan (gwregel)
re, ar re, reoù, ar reoù
holl, an holl

Raganvioù

da
e

Gerioù perc'hennañ

poelladennoù

1

Lakait ar gerioù gant ar c'hemmadurioù mat:

- Div..... a zo o peuriñ er park. (gavr)
- Div..... em eus respontet dit! (gwech)
- Aet eo an div..... d'o c'hraou. (buoc'h)
- Kemerit div..... bras a-walc'h. (kastelodenn)
- Sell ouzh an div..... (plac'h)
- Div..... zo chomet war ar porzh! (mell)

2

Hevelep labour:

- Div..... am eus: unan..... hag unan.....
An hini..... zo du, an hini..... zo gwenn. (kiez, bras, bihan, bras, bihan)
- Daou..... am eus prenet: unan..... hag unan..... (kaier, tev, moan)
- Sell ouzh ar merc'hed-mañ: an hini..... zo er skol gant ma breur, an hini..... zo ganin. (brasañ, binanañ)
- Kalz a..... zo er porzh. Ar re..... zo e koad. (bigi, kozh)
- Emañ an holl..... war..... (pesketourien, mor)
- Toullet ez eus bet ur riboul bras dindan..... ha dindan..... da..... da..... -Saoz. (mor, douar, mont, Bro)

3

Adsavit ar frazennoù-mañ en ur lakaat **re dirak an anvioù-gwan:**

- Tomm eo ar soubenn.
- Kalet eo an tamm bara-mañ.
- Diaes eo ar boelladenn yezhadur.
- Ponner eo ar sac'had kistin.
- Gwenn eo an erc'h, poan a ra d'am daoulagad.
- Dous eo an avaloù ar bloaz-mañ.

4

Adframmit ar frazennoù-mañ en ur gregiñ gant "Mont a ra da ...**":**

- pourmen war an aod.
- debriñ krampouezh gant Erwan.
- gwelet ma breur e Bro Gembre.
- dastum mouar gant Mamm-Gozh.
- gwerzhañ patatez e-pad ar vakañsoù.
- gedal ma zad e-korn an hent.

5

Stankit an toullou:

Seul..... e ri da labour, seul..... e c'helli mont da c'hoari. (buanoc'h, abretoc'h)

N'eo ket deut hiziv war..... e oa klañv. (digarez)

Na..... ket ar frouezh ruz-mañ dindan..... da..... (debrit, poan, mervel)

N'eo ket gwall..... ar geusteuenn ganeomp. (druz)

Hanter..... n'eo ket gwir, gaou ne lavaran ket. (gwir)

6

Lakait an anvioù roet etre krommelloù gant ar c'hemmadur mat:

Pegen lous eo da..... ha da..... (daouarn, beg)

Erwan en deus kollet e..... hag e..... (manegoù, boned)

Ur wech bennak e kollo e..... ivez. (penn)

Yann a gas e..... istor gantañ evit deskiñ e..... (kaier, kentel)

Ma zad en deus torret e..... hag e..... (karr, kar)

N'eo ket laouen Herve, kollet en deus e..... o klask war-lerc'h da..... (devezh, kartenn-anv)

Adsavit ar frazennoù-mañ en ur lakaat **Nolwenn** e plas **Tugdual**.

Tugdual en deus gwisket e vantell a-raok mont da c'hoari gant e gamaladed. E varc'h-houarn en deus kemeret. Goude-se ez aio da gerc'hat e vreur Mikel er skol. Prenañ a raio ar gelaouenn evit e dad hag ur pakad kig evit e gi Moutig. Ne vo ket re bonner e baner. Gwalc'hiñ a raio e zaouarn a-raok debriñ e goan ha mont a raio da zeskiñ e gentelioù en e gambr. Chom a raio marteze da sellet ouzh e zastumad kartennoù-post pa vo en e wele, da c'hortoz ma teufe e vamm da boket dezhañ.



AR C'HEMMADURIOÙ MESKET

lennadenn

O c'hortoz Tudual emañ Mamm. Met hennezh a zo c'hoazh o vazailhat en e wele! O virviñ emañ an dour. Chom a ra c'hoazh un tamm keuneud o tivogediñ en oaled.

— O tont pe o vouzhañ emañ? N'emañ ket, 'vat! O vlej al emañ Tudual bremañ.

— 'Keit ma vroustez da vlev, eme Vamm, e tastumin da zilhad lous... Ha ma welan ac'hanout o trailhañ paper pe o tistagañ pajennoù ma levrioù e virin ouzhit da vont da c'hoari goude merenn!

— Ma tebran buan e c'hellin mont ganit, Mamm?

O welet neuz ankeniet he lampon e vousec'hoarzh Mamm.

— Ma c'hellfes bezañ prest a-benn dek munutenn... Met a-raok dont e walc'hi da fri! Leun a chokolad emañ! Ma vastarez da zilhad! ... O, ma Doue! Re verr eo da vragoù. Re vuan e vrasaez, ma mabig!

goulennoù

Islinennit an holl verboù a welot en destenn gant ma vo dirazo **o**, **ma**, **e**. Klaskit stumm ar verboù-se er geriadur (stumm an anv verb). Islinennit lizherenn gentañ pep hini.

Ha bremañ, leugnit an daolenn-mañ:

Anv-verb hep kemm	pa vez O dirazañ	pa vez MA dirazañ	pa vez E dirazañ
Gortoz	o c'hortoz		
Gellout		e c'hellin	ma c'hellfes

Diwar lenn an daolenn savet ganeoc'h, klaskit sevel reolenn ar c'hemmadurioù a c'hoarvez goude **e**, **o**, **ma**.



Ar c'hemmadurioù-se a vez graet kemmadurioù mesket anezho dre ma 'z eus en o zouez kemmadurioù dre vloataat evit **g, gw, b** ha **m** hag ur c'hemmadur dre galeataat evit **d**

kentel

Goude O rannig-verb,
goude E rannig-verb,
goude MA stagell,
e kemm lizherenn gentañ ar verb da heul:

al lizherennoù-mañ **G Gw B M D**
 a zeu da vezañ **C'H W V V T**



GERVEL

O
E
MA

C'HERVEL
C'HALVAS
C'HALVAN

GWELET

O
E
MA

WELET
WELAN
WELEZ

BROUSTAÑ

O
E
MA

VROUSTAÑ
VROUSTIN
VROUSTIT

MIROUT

O
E
MA

VIROUT
VIRIN
VIRFEMP

DAÑSAL

O
E
MA

TAÑSAL
TAÑSONT
TAÑSO

poelladennoù

1

Grit ar c'hemmadur mat war ar verb:

O..... kafe emañ Yann. (malañ)

Ma breur bihan a zo o..... e zaouarn. (gwalc'hiñ)

Emañ Rozenn o..... ar c'hreionoù. (dastum)

Petra emaoe'h o..... (debriñ)

War an aod emañ Tad-kozh o..... (bale)

O..... emaoe'h? (dont)

2

Lakait an anv-verb gant ar c'hemmadur mat:

- O..... emañ ar c'hi. (galoupat)

- O..... da zilhad emaoe? (gwiskañ)

- O..... emañ ar soubenn. (birviñ)

- O..... emañ an tan en oaled. (mervel)

- O..... ur gavotenn emaint. (dañsal)

3

Implijit ar verboù roet etre krommelloù en ur ober ar c'hemmadur mat. (1U = kentañ gour unan)

- Ma..... ac'hanoc'h o c'hoari amañ, e..... ho tad!
(gwelet 1U ; gervel 1U)
- Bemdez e..... amañ? (dont 2U)
- Gant mall e..... ar vugale an tad Nedeleg. (gortoz 3U)
- Keit ha ma..... e chomo Yann en e gorn. (blejal, 3U amzer da zont)
- Gant ma..... (gellout, 2U amzer da zont)
- Peur* e..... ma zamm bara? (gounit, 1U amzer da zont)

4

Sellit ouzh ar skouer ha savit 3 frazenn verr gant pep verb.

A. O c'haloupat emañ ma marc'h.

B. Re vuan e c'haloupez.

K. Ma c'haloupez re, e vi dialanet bremaik.


Deredek

Mouzhañ

Gedal

Gwerzhañ

Bountañ



AR C'HMMADURIOÙ

DRE C'HW EZHADENNIÑ

27



AR C'HEMMADURIOÙ DRE C'HWEZHADENNIÑ

lennadenn

“Ma *c’hi* ha ma *c’hazh*
a zo ... mmm...”

— Petra ’maout o kanañ, ma *faotrig*?

— O kanañ n’emaon ket, tad-kozh. O teskiñ ma *c’hentel* ! Sellet a rafes ouzh ma *c’haier* ?

— Ya, sur ! Hini da c’hoar n’on ket deut a-benn da welet. Kollet he devoa he *c’haier*, he *c’hreion*. Ur wech bennak e lezo he *fenn* war he lerc’h ! Sell ! Ar gazhez zo kousket war ma *c’hador*. Morse ne vez en he *faner* !

— E ti Nolwenn ez eus tri *c’hazh* has ur *c’hi*. Nann, ur giez eo ; n’eus ket pell ’zo he deus ganet nav *c’hi* bihan ! He *zad* hag he mamm a lavar e torront o *fenn* dezho.

— Me, ma *faotrig* bihan, ma ’m bije nav *c’hi* em zi ez ajen da gousket em *c’harr* ! Ale, gwelomp ar *c’haier*... Ar c’hemmadurioù... Opala ! Te a vo mat d’ober ur *c’helenner* !

— Kelenner ne vin ket, tad-kozh ! Evel ma *zad* e rin : tresañ a rin evit ar *c’helaouennoù*... Pe neuze e labourin evit ar skinwel ha laouen e vo ma *zud* o welet ma *fenn* bemdez !

goulennoù

Sellit ouzh ar gerioù livet e glas.


Petra eo o stumm er geriadur ?

Peseurt kemm a zo enno ?

Peseurt gerioù a gavit en o raok ?

kentel

1 Goude ar gerioù perc'hennañ **ma, he, o, em, am,** ha goude **tri, teir, pevar, peder, nav, e** kemm lizherenn gentañ an anvioù o kregiñ gant K, T pe P. Evel-henn:



2 Ar c'hemmadur **k/c'h** a c'hoarvez goude ar ger-mell evit an anvioù lies (nemet an anvioù tud gourel) hag an anvioù gourel unan.



Ar c'hemmadurioù dre c'hwezhadenñiñ a c'hoarvez ivez pa vez un anv-gwan doareañ pe niveriñ **dirak** an anv:

Ur c'hozh ti

Ar c'hentañ gwech

hag ivez en anvioù-gwan en o derez uhelañ:

Ar c'hoshañ eus ar skolidi



poelladennoù

1

Grit ar c'hemmadur mat:

Ma..... 'm eus echuet hiziv. (kaier)

Tri..... a oa prest da loc'hañ. (karr-boutin)

Peder..... ha tri..... a oa er familh-se. (plac'h, paotr)

Ar..... -mañ zo ur..... savadur. (kastell, kozh)

Ar vugale a zo aet kuit gant o..... (tud)

Ma..... he deus kavet he..... (kazhez, par)

2

Hevelep labour:

Pevar..... am eus prenet. (kreion)

Lakaet o deus o daouarn war o..... (penn)

Eus pevar..... ar vro e tere de an dud. (korn)

Leun e oa ar..... gant meskl. (kelornioù)

Dirak ar stalig e oa tud o follennata ar..... (kelaouennoù)

Brudet-holl eo ar..... -se. (kanerezed)

Lakait e e-lec'h he,
ma e-lec'h da:

Gwisket he deus he mantell hag he zok.

Da gazhez he deus naon!

Echuet he deus he zresadenn, ha desket he c'hentel.

Selaou a reont da ganaouenn.

Kouezhet eo da greion diwar da daol.

Torr eo he zroad kleiz.



AR C'HEMMADURIOÙ DRE GALETAAT

Iennadenn

— JAKEZ!!! 'Maoc'h ket o soñjal chom en ho kwele betek kreisteiz, 'michañs? Gwiskit buan ho tilhad ha broustit ho plev hag ho tent! Ho kervel a rin pa vo prest ho merenn-vihan ... Ha gwalc'hit mat ho taouarn, mar plij! Goude merenn e vo ret deoc'h skrivañ d'ho preur Yann.

— Adarre? E miz Du em boa skrivet dezhañ ...

— C'hwi 'welo, Jakez! Pa viot pell diouzh ho pro e viot laouen o kaout keloù ingal!

— Me 'chomo e Breizh! Da viken!

Goulennoù

Klaskit an anvioù pe anvioù-verb a zo HO dirazo. Lakait an destenn en ur ober dre an eil gour unan (te). Peseurt kemm a welit? Skrivit an anvioù evel m'emaint er geriadur. Gouest oc'h da lavaret pe lizherennoù a gemm goude HO?

Klaskit sevel hoc'h-unan an daolennig-mañ:

**Lizherennoù ma c'hoarvez
kemm enno**

--	--	--	--

Lizherennoù kemmet

--	--	--	--

kentel

1

Goude ar gerioù perc'hennañ **ho**, **ez**, hag **az** e c'hoarvez kemmadurioù dre galetaat.



poelladennoù

1

Lakait an anvioù pe anvioù-verb gant ar c'hemmadur mat:

Savit ho..... (daouarn)

Na sunit ket ho..... (biz)

Leuniet e vo ho..... deoc'h? (gwerenn)

Gwelloc'h e vije stagañ ho..... (ki)

Daoust ha gwalc'het hoc'h eus ho.....? (daouarn)

Ho..... a rin pa vin prest. (gervel)

Mont a raio Chanig d'ho..... (gwelet)

O soñjal emañ distreiñ d'az.....? (bro)

An Aotrou Maer a vo plijet ouzh ho..... (dimeziñ)

N'oc'h ket prest c'hoazh, c'hwi ho-.....? (daou)

Chom a ri ez..... e-pad pell? (gwele)

Ret eo prestañ da levr d'az..... (breur)